

Kinniguet da Botret glaz Breiz

(13 Septembre 1903.)

R E N A N

Var dôn : Sant Ervoan.

REFRAIN Na neus quet en Breiz, na neus quet unan
Na neus quet eun den' vel Ernest Renan. (bis)
Ganet ez eo bet en eur guêr seder,
En bordic ar mor, barz en Landreguer. (bis)
Kasset oe d'ar skôl gant ar vêleyen,
Diski rez buan compta, skriva, lenn. (bis)
He speret digor, he galon dener,
Ha oe remerquet gant bêleyen kêr. (bis)
C'hoant ho doa d'ober gant'han eur belec
Da Baris oa êt d'ar skôl 'vel cloarec. (bis)
Mes he speret lemm, barz er Scrituriou
Na welas souden nemet coz cojou. (bis)
C'harpet gant he c'hoar neuze neus losket
Ar soudanen dù var he guein laket (bis)
Ha pad he vuez, he neus grøet brezell,
D'ar gaou ha d'ar fall, kreur, ha vøez huel. (bis)
Skrivet neus levriou, kaër ha lugernus
'Lako he c'hano da veza padus. (bis)
Barz n'he levr quantan, he diskuellas plen
Penaos Jesus-Christ ne oa 'met eun den. (bis)
Ha cetu petra, potret an illis
Da Renan breman diskoe ho malis. (bis)
Mes te pobl ha vreiz, lenn levriou Renan,
Lêz ar botret dù d'a c'harzal ont'han. (bis)
Sav' ta zont n'hez sa, pobl braz, kalonec
Serr' da diou scouarn da vøez ar belec (fin)
Renan a vevas, dre holl enoret
Qant ar bed a bez, estimet, karet. (bis)
He vuez santel, he nerz, he skiant,
Lakas en servich ar gwir diskamant. (bis)
He levriou brudent, he dalant ken braz
Da vreiz ha roïa henor da viskoas. (bis)
Rac se tud ha vreiz, kanomp ha bøez penn
Gloar ha meulodi Renan da viken ! (bis)
Gloar ha meulodi da guêr Landreguer
Ha deus bet maguet eur spered ken kaër ! (bis)
Ha ma reont trouz ar botret dù diot

Gloar ha meulodi da Gomb, da Chaumié
So en Landreguer en hon touez, hirie. (bis)

Ha ma reont trouz, ar botret du, diot,
C'hopomp oll a bez : « Hou ! hou ! la calot ! » (bis)

A.

